

KANOMP NOUEL!

War don: Nouelenn Berc'hed.

Diskan

Kanom Nouel, kanomp ervad:
 Da dud ar vro eur blavez mad,
 Eur blavez mad digant Doue
 Hag ar Baradoz d'o ene!

I

Setu ni ama, breudeur ker,
 O kana kantik Hor Zalver,
 Rag an noz-ma eo bet ganet
 Jezuz, Hor Mestr, Salver ar Bed.

II

Jozef ha Mari, e bried,
 Da Vetleem ' oa o kerzet
 'Vid beza eno niveret,
 Hervez an urz a oa deuet.

III

Tost da Vetleem digouezet,
 Lojeiz o devez goulennet.
 Lojeiz, mar plij, a c'houlennant
 En an' Doue pe 'vid arc'hant.

IV

"Ni ne lojomp ket a beorien,
 Met tudchentil ha barnerien;
 'Barz an ti-ma ne vez lojet
 Nemet prinsed ha baroned."

V

" 'Barz an ti-ma ne vez lojet
 Nemet aotrouned ha prinsed,
 Nemet aotrouned ha prinsed,
 Noblans ar roue pa vez red."

VI


Enkrezet-holl, Jozef neuze
 ' Zelle ouz Mari gant true
 Ha Mari ' gerze gant he hent,
 Brasoc'h he anken evid kent.

VII

Repu ' gavas 'n eur c'hraou dister
 Digor d'ar glao, d'ar zeiz amzer,
 Plouz dindani eun nebeudig
 Ha foenn warni eun dornadig.

VIII

En eun tu dei ' oa eun azen
 Ha c'hoaz en tu-all eun ejen;
 Gwaskedet gant an daou lôn mud
 ' Tiskuzas Mamm Salver an dud.



IX

'Barz ma kanas ar c'hog d'an de
'Oa ganet Jezuz, Mab Doue,
Hag e vamm, ar Werc'hez Mari,
'Rankas he-eun e vailhuri.

X

An Eled, deut eus an Neñvou
Da zigas d'an holl ar c'helou,
A lintre gant ar sklerijenn
Hag a gane a-bouez o fenn:

XI

"En Neñv, da Zoue, gloar ha brud
Ha, war an douar, peoc'h d'an dud!
Peoc'h d'an dud a volonte vad,
Ma veulint Doue, o gwir Dad!"

XII

Hag evid dont da adori
Ar Bugel-Doue, Mab Mari,
E tilezas ar Bastored,
E-kreiz ar mene, o deñved.

XIII

Herchet gant moueziou dudius,
E tiredjont daved Jezuz,
O laret, laouen ha seder:
"Deomp ez eus ganet eur Zalver!"

XIV

N'eo ket en eur gampr alaburet
Eo bet ganet salver ar Bed;
En eur c'hraou na tomm na klouar,
Eo deut 'vidomp war an douar,

XV

En eul laouer, war eun tamm foenn,
'Tre eun azen hag eun ejen,
Gwasoc'h evid an den paoura
Hag ar reuzeudik distera,

XVI

Oc'h ober fe war an danve,
Da brezeg deomp ar garante
'Vid m'hon devo, er Baradoz,
Eur plas diwêtoe'h da renoz.

XVII

O! Doue Braz, Mestr an Neñvou,
Ho pet true ouz ar broiou
En em dag hirio gwasoc'h-waz,
E riskl d'en em zispenn, siouaz!

XVIII

Lakait ho lezenn just ha mad
Da ren dre ar Bed-Holl ervad,
Ma c'hellho ho krouadurien
Ho trugarekaat da viken!

Aotre da voula
Kemper IO a viz kerzu 1956
V. FAVE
vikel vraz.